

Strid



Roundou

ROUDOÛ II

ROUDOÛ II

ROUDOÛ II

ROUDOÛ II

ROUDOÛ II

ROUDOÛ II

II ÚODUOR

ROUDOU II

Setu erfin ROUDOU II.

Laket en deus kalz amzer da zont er maez met
deut eo a-benn ar fin.

Kalz a varzhonegoù brav a zo e-barzh a ziskouez
eo trubuilhet ar re yaouank - muioc'h 'vit ma soñj
deomp alies - gant kudennoù don ar vuhez hag ar
marv. Sensibl int ivez d'ar bed en-dro dezho, d'an
natur, d'an dud. Hag o dije c'hoant da larout an
holl draoù-se e brezhoneg a ziskouez eo c'hoazh
bev ar yezh e buhez hag e kalon ar re yaouank.

Embannet gant SKRID
Gwendal DENEZ
Ri - Ploare - 29100 DOUARNENEZ

1981

Liza GUIZIOU

PRENESTR

E-barzh ma soñjoù
Ur prenestr a oa digoret ...
War an huñvre
War ar sioulder

Selaou ar peoc'h
Klev an noz
Sell ouzh ar stered
Gwell ar c'hevren ...

Amañ 'mañ
Kuzhet, ankenius ...

Ya, bez 'eus ur c'hevren
Aze, dreñv ar prenestr

Digor anezhi !

A.V. D'HERVEZ
Plomodiern

AN HEOL 'ZO DU

pe

GWERZ PLOGON

Kenavo
Laboused-mor
Kenavo
Avel al lark
Kenavo ...

Warc'hoazh, warc'hoazh e vo marv ar sklerijenn
Barzh liv an envorennoù
Warc'hoazh ne vo ket mui delioù
war ar gwez ...
ne vo ket mui bleunioù
barzh o liorz ...

Warc'hoazh ...

An heol 'zo du war Plogon
An heol 'zo du

Met evit an deiz goude warc'hoazh
Bugale ar vro
E anv hon tadoù kozh
Savit !

SAVIT !

Ana-Vari D'HERVEZ
Plomodiern

PEDADENN

Deus ganeomp
Da welout pelec'h
En deus kuzhet Marzhin alc'houez
An amzer dremenet

E ti ar Strobinneller ez eomp
Gant al laboused hag ar bleunioù
E kastell ar Vari Vorgan ez eomp
Gant ar c'houmoul hag an tarzhioù

D'ar pevar avel
E kanimp
Evit an amzer da zont

Deus ganeomp
Deus ganeomp da zañsal
Barzh parkoù leun gant erc'h

D'ar pevar avel
E kanimp
Evit an amzer da zont

E kastell ar Vari Vorgan ez eomp
Gant ar c'houmoul hag an tarzhioù

E ti ar Strobinneller ez eomp
Gant al laboused hag ar bleunioù

Deus ganeomp
Da welout pelec'h
En deus kuzhet Marzhin alc'houez
An amzer dremenet.

Ana-Vari D'HERVEZ
Plomodiern

SON AN HAÑV

Miz Even - Deut eo an hañv
D'al laboused da ganañ,
D'ober o neizh barzh ur wezenn
Pe a-wechoù war un drezenn

Miz Gouere - Barzh ar parkeier melen
E vez gwelet al labourer douar o tastum foenn.
Er prad, er c'hoad, el liorzhioù,
C'hwezh vat gant ar bleunioù.

Miz Eost - Selaou ar sonerezh
Kaer an heol ha splann ar vuhez
Selaou son an dornerez
Taño ar greun, c'hwezh ar plouz nevez.

Miz Gwengolo - Plas d'an diskar-amzer
Livioù aour gant ar maezioù.
Met ar gwez a goll o delioù
Hag ar vugale o vakañsoù.

Pa oan bihan
E veze lavaret din
"...Pa zeui bras"

Koshoc'h on bremañ
Netra neus cheñchet
N'eus netra aes
Netra brav.
Ne vevan ken evit un devezh
.....marv

Kavet em dije gwelloc'h
Chom bihan,
Pe marteze ...
Bezañ morse bet ganet.

MARC'H MA MIGNON

Pe brav ha kreñv out pa 'maout o redek
barzh ar parkoù hag ar Pradoù glas

Te a zo gwellañ keneil an den
Sikouret p'eus anezhañ evit e labour
ha laret en deus dit "Trugarez"

Gwenn, du, gris, kompez pe brizh,
Ur galon vat teus, ha tout a rez
'Vit ober plijadur d'az mestr

Ul loen brav out. Evidon out ar bravañ
loen a anavezan war an douar.

Jacqueline DANIEL
Pleuveilh

AN NEVEZ HAÑV

En nevez-hañv, e miz Meurzh,
Ez eus bleunioù a bep seurt,
Forzh pegement, 'barzh ar fenneier,
E bord an hentoù, betek miz Even.

En nevez-hañv, ez eus ivez
Laboused bihan e-barzh ar gwez,
Balan war ar c'hleuz,
Ha gwez frouezh e bleuniv.

Plijout a ra din an nevez-hañv
Peogwir e teu en-dro an natur goude ar goañv,
Ar gwez a zo en-dro e bleuniv
Ha bleunioù zo war ar c'hleuz.

Plijus eo mont da bourmen kichen an aod
Vit analañ aer ar mor betek an noz
Amzer vrav 'zo en nevez-hañv
Ha tommoc'h eo eget ar goañv.

AL LABOUS BIHAN

Demat,
glav a ra hiziv war an douar
Koumoul louet e-giz houarn
a welan dre ar prenestr
N'eo ket brav evit al lestr.

Ul labous bihan e-barzh e zorn
ar bugel a c'hoari.
Al labous a gan an nevez-hañv
met an nevez-hañv ne glev ket.

Brav eo kan ar glav
e dakennoù o skeiñ war ar gwer.
Ar bugel a chom dindan
evit gortoz an nevez-hañv.

Trugarez labous bihan
Kanet a t'eus awalc'h
An heol a luc'h e-barzh ma c'halon
Trugarez bugelig, an nevez-hañv a zo erru evidon.

Kerzh, labous bihan
da ganañ dre ar bed,
d'ober plijadur d'ar vugale all,
d'ober an nevez-hañv e-pad ar bloaz. Kerzh

*Brigitte le DONGE
Ploneour-Lanvern*

AR GOAÑV

Ar vamm, ar vamm a zo azezet
E-kichen ar siminal gozh
O rollañ ar gloan gris
War he c'harr-nezañ kozh.

Deut eo ar goañv
'Giz ma teu bep bloaz
Atav eo ar vuhez ar memes hini
E-pad ar mare-se

An tad, an tad a zo azezet
E-kichen ar siminal vrav
O fardañ gant e zaouarn
Un nebeut paneroù brav.

Deut eo ar goañv
'Giz ma teu bep bloaz
Atav eo ar vuhez ar memes hini
E-pad ar mare-se

Sellout a reont ouzh ar goañv o paseal
Met en o huñvreoù emañ an nevez-hañv
Paseal a raio an hañv hag an diskar-amzer
Ha... dont a raio ar goañv en-dro.

*Michèle NIGNON
Penmarc'h*

SKUIZH ON AET

Glav a zo em daoulagad
Avel a zo em fennad blev
Bale a ran evit mont ne vern pelec'h
Evit mont betek ar penn.

Skuizh on, o selaou trouz ar vuhez
Ar vuhez e-lec'h ma ne c'hortozan mui netra
En em veskiñ 'ra ma sell gant ar vrumenn
O kousket emañ ma muzelloù.

N'em eus ket mui c'hoant da sellout
Ouzh an dud a breg hep 'n em gompren
a glev hep selaou
a red hep dihanañ.

Tec'hout a ran eus ar bed
Ma soñj barzh an avel
Trouz an dilavar tro-dro din
Kenavo d'ar re a garan kement.

Maryvonne le CLEC'H (Gourin)
Brigitte le DONGE (Ploneour
Lanvern)

MA C'HÊR

Me zo o chom en ur gêriadenn
Ur gêriadenn vrav ha ken glas.
An hent-karr n'eo ket bet dispennet
gant ar tourter-bras

Pad an diskar-amzer
E skube tarzh-an-deiz ar poultren
En-dro d'ar gwez ...

Un tammig douar 'zo bet diframmet
Evit ober an hent bras
N'eus mui foeneg ebet
Peogwir eo marv ar stivell.

Morse ne renko den ebet ar pec'hed-se
Poanius eo gwelout hor planedenn
O koll he gwrioù.

Nicole ISTIN
Brieg

Graet mat Aotrou ar Bed
Memes ma lavar an dud
Ne droit ket atav rond.

Trugarez evit ho menezioù
Brav int - Spontus int
Graet mat evit ho koulzoù-amzer
A ro deomp c'hoant da ganañ

Trugarez evit ar mor :
N'eo morse bet kavet
Ur gwer ken glas, ur glas ken gwer
N'eus muzik ebet a zo bravoc'h
'Vit ar gurun a ra ar garantez gant ar glav

Trugarez evit an avel
A sav an ed, a lak ar mor da grenañ
Trugarez evit ar ganaouenn
A lak plijadur e kalon ar vugale.

Trugarez Aotrou ar Bed
Trugarez evit ar goulm
Ma ne lazhit ket anezhi
E larin deoc'h e-giz-se "Trugarez"

Brigitte KRAVEC
Penmarc'h

ME 'ZO VONT

Me 'zo vont
War ar menezioù
'Vit lavar da tout an dud
Pelec'h mañ ar c'hevren kozh ...

Me 'zo vont
Gant ma sac'h kozh
Gant ma sac'h leun gant teñzorioù kuzhet
Evit degas d'an dud an tamm sklerijenn ...

Ha pad an noz ...
Ha pad an deiz ...
Me 'zo vont ...

Giz Marzhin ar Strobinieller,
Da glask al loar ...
Da glask an heol ...

Ana-Vari D'HERVEZ
Plomodiern

KANNERIEN AR C'HUZH HEOL

Ma bro garet
Soñjoù bras peus barzh o taoulagad
Kuzhet eo al loar
Met ar mor 'zo atav aze
O kontañ deoc'h istorioù kozh

Ma bro garet
Soñjoù kozh peus barzh ho kalon
Kuzhet eo an heol
Met ar mor 'zo atav aze
O kontañ deoc'h feiz hon tadoù kozh.

Barzh ho liorz
Peus bleunioù arc'hant
Barzh ho kalon
Peus heol bras

Kan a ra ar biniou ...
Pell eo ar brezel ...
Ho kalon 'zo ma buhez ...
Kan a ra ho paotred ...

Barzh ho touar
Peus klaskerien nevez
Barzh ho penn
Peus broioù nevez.

Ma bro garet
Soñjoù kozh peus barzh ho kalon
Kuzhet eo an heol
Met ar mor 'zo atav aze
O kontañ deoc'h feiz hon tadoù kozh.

Ma bro garet
Soñjoù bras peus barzh ho taoulagad
Kuzhet eo al loar
Met ar mor 'zo atav aze
O kontañ deoc'h istorioù kozh.

Kanerien ar c'huzh heol
E sklerijenn an noz
'Ijin diskanou all
Evit gwechall
Evit hiziv
Evit warc'hoazh
Evit bemdez

Ana-Vari D'HERVEZ
Plomodiern

Ganet on un devezh teñval
Gant an avaloù
Hiziv on deut bras
Gant kalz da c'houzout
Hag emichañs em bo amzer
Da zeskiñ traoù awalc'h
Raok mont da welout Doue
Marteze em bo
Ur plas mat er baradoz.

Hiziv on deut bras
Prest da labourat dija
Ha n'eus ket gwall pell 'zo
E oan o c'hoari gant merc'hodenned
Hag e oan laouen da zont bras
Deut on Gant kalz traoù d'ober
Re marteze

Hag a-wechoù e vijen laouen
Da zont bihan en-dro
Met n'eus ket moaien
Hag un devezh vo, maz on lezet
E vin kozh, gant kalz bugale
Vihan en-dro din.

Marie-Louise CALVEZ

P E L L

Kenavo tud Breizh
O vont kuit emeon
Poan'm eus barzh ma c'halon
Kenavo Bro Vreizh.

Glav a ra barzh ma soñj
Evel war an douar
Ma spered a zo o nijal
Pell eus ma buhez

Gwelet em eus barzh un huñvre
An avel war ar mor
An heol war ar menezioù du
Botoù koad dirak an nor.

Tan a zo dumañ
Diaes eo mont kuit
Kenavo ma bro
Tuchantik e vin deut en-dro

Maryvonne ar C'HLEC'H
Gourin

AR VUHEZ

Soñj a ran, ar vuhez a base
re vuhan

Da gentañ : Ar vugale "mignon tout",
o ruzañ an douar war
o fenndaouilinoù,
o trailhañ o c'hoarielloù,
hag a-wechoù,
o 'n em stagañ d'an dud,
evit deskiñ bale.

Ar merc'hed bras,
o stlejañ gant ur paotr brav,
o timeziñ gantañ,
o labourat pad o buhez
evit bevañ,
hag atav kontant gant
o bugale
atav laouen ganto.

An den kozh o pourmen,
e vaouez gantañ,
o vale goustadik,
goustadik,
o 'n em sikour
gant un tamm koad,
peogwir eo e gein
pleget e daou
gant pouez ar bloavezhioù.

AR VUHEZ

Ni n'omp ket ken paour kaezh merc'hed
Maleürus muioc'h eget eürus
Chañs n'hon eus morse
Nemet e-barzh hon huñvreoù.

Er skol emamp atav
O ruzañ hon botoù
Betek ar bacho emamp erru
Ar bloaz-mañ marteze e vo echu.

Labourat a reomp bremañ
D'eus ar mintin betek an noz
Evit gounit an tammig arc'hant
A raio deomp boued pa vimp deut kozh.

Trist eo bet ar vuhez
Re hir a oa sur awalc'h
Marteze e vo gwelloc'h er vered
E kreiz ar vourk gant ar preñved.

Brigitte le DONGE (Ploneour)
Brigitte KERAVEC (Kerity)
Michèle NIGNON (Penmarc'h)

KORVENTENN

Deuet eo ar brezel
Gant an tan
Ha gant ar gorventenn
Leun a ludu ha daeroù...

Ya, deuet eo ar brezel
e penn ar bed...
e penn ar goañv ...

Bez' eus moked war ar menez-tan...
Bez' eus gwad war ar c'hontilli ...
Bez' eus leñvoù barzh ar mouezhioù ...
Ar serr-noz ' zo ruz-flamm.

Ya, deuet eo ar brezel
e klipenn an tarzhoù...
e klipenn an oabl ...

Deuet eo ar brezel
Hag ar mor
'zo aze, lazhet,
Leun a ludu ha liv-mouk....

Met, war an traezh
ur ger 'zo skrivet gant kleiz :

DIEUBIDIGEZH !

Ana-Vari D'HERVEZ
Plomodiern - 25/6/80

Ma fell deoc'h degemer

EVIT NETRA

un niverenn eus SKRID, kazetenn ar skrivagnerien
yaouank, merkit hoc'h anv amañ :

ANV :

CHOMLEC'H :

ha kasit ar follen-mañ gant un timbr 1,60 evit
ar frejoù, da :

Yann DESBORDES

1, plasenn Charles Peguy

29260 LESNEVEN



JOHNSON